

Skoazellit AN AMZER!

Evit kenderc'hel d'he
lenn war vent vras ...

Kont Budek Post: (Dazont) Roazhon 3133.947

Trugarez vras!

AN AMZER

Kazetenn sizhuniek

Gwener 31 Here 1980

Niv.38 2 bajenn

2! bloavezh 2 lur

Mererezh, Skridaozerzh:
2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON
CPPP 62319

DIWAN

TAOL 2000: UR SIZHUNVEZH
SKOAZELL E MIZ DU

DIWAN e 1980

Degemeret mat eo bet skol vamm gentañ DIWAN e miz Mae 1977. An nep doare eo da zisplegañ penaos eo kresket ar gevredigezh a zo ganti bremañ 15 skol vamm, 1 skol gentañ derez, raktres ur greizenn sevenadurel e Treglonou ha meur a raktres all evit digerifi skolioù a-benn bloaz, 16 skolaer, 5 stajiad, 2 staeliad implijet ganti. N'eus bet skoazell ebet digant ar Stad hag ar rannvroioù, ha nebeut-tre gant ar Chart Sevenadurel.

Evit se e rank ar gevredigezh en em frammañ ha kemer doareoù un embregerezh. Pal Diwan zo reif ul lañs nevez d'ar brezhoneg en ur reif ar muiañ posubl da pep bugel evit ma c'hellfe en em ziorren (developiñ). Ar pal-se 'zo abeg kentañ ar gerezhag ar c'huzulioù skoazell, nemet evit ma c'hellfe bezañ kaset da benn eo ret deomp labourat start evit kavout arc'hant en ur aozañ a bep seurt abadennoù (kanerien, ker-mesoù, festoù-noz, bazar h.a.)

23 a dud a labour amzer leun barzh 'Diwan, un aozadur sevenadurel hag a implij ar muiañ a dud gopret e Breizh. 0 gopr (2.800,00 lur rik.) gant tout ar chargoù (sokial ha mont endro) a goust evit pep skol 6000 pe 6500 lur. Bep miz eta e ranker labourat evit kavout an arc'hant-se, ha n'eo ket hep poan. Gouestlet 'vez kalz amzer gant stourmerien Diwan (kerent, tud gopret ha kuzulioù - skoazell) evit ijinañ ha kas da benn gouelioù h.a. Perak e rank ur familh dont da vezañ "stourmer a vicher" pa en deus c'hoant lakaat e bugel e barzh Diwan? Peogwir ne vez ket graet e labour gant an deskadurezh vroadel. 1.000.000 lur nevez ne dalvez mann ebet evit un ezhomm a 1.600.000 lur nevez e 1980. Ha peur e vezo ur servij publik evit un deskadurezh demokratel hag adnevesaet e Breizh, ha Diwan e-barzh? Ha peur e vezo desket brezhoneg ha pep tra e brezhoneg eus ar skol vamm betek ar skol veur?

Ar c'hren-douar e kostez Aljer

Tennañ a reomp eus ul lizher degouezhet ganeomp nevez 'zo ar bomm-mañ :

"Digwener hon eus santet, ni ivez, daou gren-douar, an hini kentañ krefvoc'h eget an eil, nemet ne ouiemp ket, eveljust, petra a oa oa c'hoarvezout. Gwelet hon eus er gêr ar mogerioù o fifval nemet n'hon eus ket bet aon. Evidon, kredet em eus da gentañ e oa va fenn o vezevenniñ. En HLM-où avat eo bet gwashoc'h hag an dud a zo bet spontet-bras p'o deus gwelet ar mogerioù anezho oc'h horjellañ-dihorjellañ. Neuze e voent gwelet o redek er straedoù. An dud a oa o pedif er voskeenn o

Poblekaat kudenn al Liger Atlantel

Un dornad tud e Naoned d'an 18 a viz Here

deus lammet er straed a-ziwar al leur-doenn ha lod anezho a zo bet gouliet. Lojet eo bet an dud na felle ket dezho mont en-dro en o zi er skolioù hag er salioù-sport. Ar gwashañ -tout, d'am soñj, eo bet gwelout an dud, spont enno, o redek-diredek hag o youc'hal e-lec'h sederaat o bugale o krial hag o leñvañ. En El Asnam avat eo euzhus ar gweled. A-vernioù eo e tastumer eno ar c'horfoù marv pe pezh a chom diouto ha gwashoc'h kalz eo ar gweled en devez eno eget pezh a vez diskouezet deomp dre ar skinwel. Leun-barr eo an ospitalioù..."

Naoned.— N'eo ket ur bobl a dud a oa en em vodet dirak tour Breizh da geñver ar vanifestadeg evit unanidigezh Breizh. Wardro 2.000 a dud nemetken a oa o tibunañ disadorn 18 dre straedoù kêrbenn gozh Vreizh.

En em gavet e oa eno, evel ar gwechoù all, kalz a aozadurioù breizhek evel Kendalc'h, Ar Falz, an T.S.A.B., Skol an Emsav..., hag ivez strolladoù politikel evel an MRG Breizh, ar P.S.U.-Breizh, an UDB, SAV, met ar boblañs ne oa ket anezhi tamm ebet.

Ma nec'heller ket lavarouteo bet c'hwitet o zaol gant aozerien ar vanifestadeg, ret eo anzav e seblante ar berzhidi un tamm skuih, kuit da lavarout digalonekaet.

Eveljust, pouezus eo lakaat seurt oberioù war-sav, dreist-holl pa ouzer n'eo deus ket tro alies ar Vrezhoneg da reif o mouezh da glevout dreist d'ar bropaganda ofisiel.

Hogen, ha pegen m'eo trist an evezhiadenn-mañ, ret eo lavarout n'eo ket tomm-tomm poblañs Bro Naoned ozh ar gudenn. Gwelet e oa ar vanifestadeg gant an dremenidi evel un dra folklorel mui-pe-vui.

Ne oa ket eta, peadra da vezañ laouen diwar ar vanifestadeg, zoken ma 'z eo bet degemeret houmañ mat dre vras gant an Naonediz. Rak, gwelet

a2

HENTOU BALE E BREST?

Brest. - Abaoe deroù ar miz ez eus bet kempennet hentou-bale 'zo e kreizkêr Brest (straed Jean-Jaurès, straed Sant-Marzhin). Evit ar mare n'eo ket peurglok an hentou-bale-se. N'eo nemet evit gou-

zout hag-eñ e plijont da Vrestiz. Evit-se ez eus bet embannet ur roll-goulennoù da vezañ leuniet gant tud kêr. E brezhoneg ivez ez eus bet moulet follennoù 'zo, embannet gant Oaled Sant-Erwan.

Skoazell An Amzer

War an niverenn diwezhañ e c'houlennomp skoazell ouzh hol lennerien, evit kenderc'hel da embann AN AMZER, ha war vent vras ma 'z eus tu.

E-pad ur pemzektez n'eo ket deuet er-maez, hon digarezit evit-se.

Setu roll ar reo deus skoazellet ac'hanomp betekhen, hag o trugarekaat a reomp.

Kendalc'hit da gas deomp ho profoù, ha panevefe un nebeut gwenneien e vefe mat dija!

- M. Coarer (Naoned) 100
- K. (Montroulez) 300
- K. 100
- J.Y. & I. Le Goas (Naoned) 25
- J.Y. Le Touze (An Oriant) 40
- K. (Roazhon) 100

war un dro: 665

Komzoù sirius?

D'ar sadorn 18, e-doug keleier "Broioù al Liger" er skinwel, diskouezet ez eus bet un interview gant Olivier Guichard, da geñver ar redadeg vigi "Ar Baol-Dakar". Ha lavaret en deus maer ar Baol e oa

ar redadeg-mañ un dra bouezus-kenañ evit kreisteiz Breizh ...!

Petra a zo troet e penn kadoriad Kuzul-Rannvro "Broioù al Liger" ?

al Liamm

Kelaouenn an holl

Danevelloù - Barzhonegoù - Studiadennoù

Keleier

koumanant: 55 lur

P. Le Bihan: 16 rue des Fours-à-chaux St Malo

DIWAN:TAOL 2000

p.1

N'eo ket hiziv na warc'hoazh emichañs met perak ne vefe ket goude warc'hoazh ? Da c'hedall ret eo en em lakaat a zevri da labourat evit skolioù Diwan evit ma c'hellfe ar brezhoneg ha sevenadur Breizh mont war-raok. E pe stuj e c'hellfe ar Vretoned reiñ skoazell da z/ Diwan:

- kenlabourat start gant ar c'huzulioù skoazell ;
- kalonekaat ha skoazellañ en ur gas profoù pe gwelloc'hen ur gas arc'hant en un doare ingal bep miz.

Taol 2000

Etre an 22 hag an 29 a viz du, tud Diwan (kerent ha kuzulioù skoazell) a yelo da welout mignoned pe amezeien, stourmerien pe dud a-du gant Diwan evit displegañ dezho petra eo Diwan, he faliou, he c'hudennoù. Goulenn a raint diganto reiñ arc'hant en un doare ingal bep miz (virement otomatik) da z/Diwan. Evit gwir, an nep doare eo evit ar skolioù da zont a-benn eus o c'hudennoù arc'hant. Pep hini a c'hell reiñ pezh a gar hag ivez ar pezh a c'hell etre 10L, 20, 50, 100pe muioc'h. Pouezus tre eo evit ar gerent hag ar c'huzulioù skoazell en em santout skoazellet er strivoù a reont bemdez evit ar brezhoneg. An doare 'zo ivez an hini eeunañ a c'hell bezañ roet gant pep Breton a-du ganeomp. Leuniañ a reer ur goulenn a vez kaset d'an ti bank ha da c'houde bep miz e teu ingal keit ha ma ne vez ket cheñchet gant an hini en deus graet.

Ar pal da dizhout zo 2000 a dud e Breizh a-bezh ha gant Breizhiz divroet. Ma vez tizhet ar pal-se ganeomp ez eo an hanter eus ar pezh hon eus ezhomm evit 1981 a vo gounezet. Pep skol a welo sklaeroc'h hag a c'hell neuze prientif an dazont gant muioc'h a sioulded, ar gerent en em soursio a-eus gudenn ar bedagogiezh hag kudenn ar brezhoneg er fami-

UR PAOTRIG

Mark SEURIALL

(Kendalc'h)

- " Nozvat, Itron.
- Nozvat, Aotrou. Daoust hag amañ emañ an Ao Komiser?
- E welout a fell deoc'h?
- Ma 'z eo posubl. Me a zo an Itron K.
- Ur c'homiser? " eme souden Stefan.
- Ya, ur c'homiser. Ne c'hell-an ket da virout evel-se, e-keit m'emañ da dud o c'hortoz ac'hanout.
- A... "

lhov ; skolioù nevez a c'hell bezañ digoret, - skolioù mamm ha kentañ derez.

'Diwan' 'zo bet diorreet a-drugarez da skoazell kalz a Vretoned hag a-drugarez da Vretoned niverusoc'h-niverusañ; evit difenn o yezh e kendalc'ho 'Diwan' da gas da benn e labour.

Evit kaout titouroù : 'Diwan' 29 214 Treglonou. Plg. : 98 04.05.42.

p.1

o deus Brezhoned o tibuniñ hep en em santout o-unan lod eus ar Vrethoned-se. Hag-eñ n'emañ ket amañ an dalc'h?

Bremañ, petra a chomo war-lerc'h an devezh-mañ? Forzh penaos, ne cheñcho ket an traoù a-dra-sur, da vihanañ evit pezh a sell ouzh ar benvegadurioù-stad (appareils d'Etat) evel ar yoc'hstlennoù (mediaoù), ar melestrerezh, h.a.

Ret e vo, avat, kenderc'hel gant seurt oberioù, met ne vo ket a-walc'h ma n'eo ket diazezet ar stourm ar buanañ ar gwellañ er metaouioù (milieux) poblet, rak ma 'z eo bet roet lañs d'an emsav gant an intel-ektualed, mall bras eo bremañ deomp lakaat an emgann da zont war un dachenn nevez, poblekoc'h, kuit da flamm an emsav bezañ lazhet un deiz.

D'ar vicherourien, d'an ar-tizaned, d'an implijidi em-skiantek eo eta donaat an emsav dre stourm e-barzh pep rann eus ar c'henreizhadur sokial.

Evel-se nemetken eo ez ay ar maout ganeomp ha da c'halvadegoù an nerzhoù demokratel bezañ klevet gant mui-oc'h-mui a dud.

Gwir eo ne vo ket aes mont war an hent-se, met n'eus diskoulm all ebet evit lakaat an emsav da zont er-maez eus geto an intelktualed m'emañ o vejetin ennañ abaoe re bell 'zo endeo.

Padrig KADOREL

OALD SANT-ERWAN

Savet e 1968, Oales Sant-Erwan a zo ur greizenn sevenadurel a spered katolik o labourat evit ar brezhoneg. Kinnig a ra deoc'h :

- 1.- Kentelioù brezhonek digoust, koulz evit ar re a zo o kregiñ gant ar yezh evel ar re a zo o klask barrekaat warni. Roet e vez ivez kentelioù d'ar vugale en anv strollad "Emglev an Tiegezhioù".
- 2.- Kaozeadennoù pe gendivizoù ur wech ar miz e-pad ar bloavezh-skol.
- 3.- Kelc'hioù-studi war ar feiz kristen, renet gant ur beleg, bep merc'her eil diwezhañ ar miz, eus miz Here betek miz Mezheven.
- 4.- Ur sal hag ur stal-wer e-lec'h ma vez kavet kalz embanadennoù brezhonek da brenañ pe da amprestañ.
- 5.- Tud da vrezhonegañ ganeoc'h d'an eurioù digor-mañ :
 - bep lun eus 17 eur 30 betek 19 eur 30 ;
 - bep meurzh eus 18 eur betek 20 eur ;
 - bep merc'her eus 14 eur betek 16 eur ;
 - bep yaou eus 18 eur betek 19 eur 30 ;
 - bep gwener eus 17 eur 15 betek 18 eur 15.

A-hend-all ez a Oaled sant-Erwan d'ar gouelioù ha pardonioù a vez lidet amañ hag a-hont. Tu he devez evel-se da zivizout gant an dud ha da zisplegañ he stalig-werzh. A-unan gant strolladoù all e kemer perzh e buhez sevenadurel kêr Vrest.

Chomlec'h : 28, straed Charles-Berthelot, Brest.

Eno e kavot kement titour ho pefe ezhomm da gaout.

Grit bruderezh e-barzh AN AMZER
Ne goust ket ker Goulennit ar prizioù

un dro souezhet gant ar goulenn ha mantret o chom dire-pont.

- Me a wel. Ne oar ket ken e pelec'h emañ o chom; n'anavez ket ar c'harter-mañ, rak-se e tle bezañ e lojeiz en ur c'harter all.

- Iskis eo " eme ar poliser all, " emaoomp amañ e kreizkêr, ha pep hini eus an dud a anavez kreizkêr, ha penaos mont kuit ac'halese.

- Eveljust " a gendalc'h ar c'homiser, o torlotañ e elgez, " iskis eo, eveljust ". Ne fiñv ket bremañ, o soñjal a-zevri m'emañ. Goude ur pennadig, ez a a-flav d'ar sal e-kichen.

(Da genderc'hel)

abadennoù skingomz & skinwel

FR3 BREIZH (UHF)

Lun 3 Du 1980

13e00.- Heklev an Deizioù. Kan-aouenn hon douar. (adskingas-adenn).

Merc'her 5 Du 1980

19e50.- Nozvat. Keleier sevenadurel, kinniget gant Mari Kermareg.

Sadorn 8 Du 1980

13e00.- Breizh o vevañ. Petra a ra ar strolladoù sevenadurel? Gant dilennidi strolladoù sevenadurel eus Breizh. Kr.Fañch Broudig. Pennaozer: Fañch Tager.

19e48.- Nozvat. Keleier sevenadurel ar sizhun.

ANTENNE 2 (UHF)

Merc'her 5 Du 1980

11e30.- Breizh o vevañ. Bi ha Maribi. (Abadenn disadorn tremenet). Un abadenn gant Mari Kermareg, aozet gant F. Tager.

RADIO ARVORIG

FM (Breizh-Izel)

Bemdez: keleier da 7e20 ha 12e20.

Sadorn 1 Du 1980

10e00.- Oferenn an Hollsent, e Ploumilio.

Sul 2 Du 1980

11e00.- Liv an Amzer, gant F. Broudig hag M. Kermareg.

Merc'her 5 Du 1980

10e00.- Ar seizh avel. Gant Benrez Grall.

Gwener 7 Du 1980

10e00.- Mesk ha Mesk. Gant Remi Derrien.

P.O. Roazhon 423 m, Brest 210 m Sul 2 Du 1980

13e00.- Liv an Amzer.

AN AMZER

Kelaouenn sizhuniek embannet gant DAZONT

2 straed ar Richardiere 35100 ROAZHON

KRP (Dazont): Roazhon 3133.94T

Rener ar gelaouenn: Mark DECAMBOURG

KOUMANANTOU:

6 MIZ (24 niverenn):	
Reizh:	36 lur
Studierien, skolidi:	24 lur
Skoazell:	40 lur
9 MIZ (36 niverenn):	
Reizh:	54 lur
Skolidi, studierien:	36 lur
Skoazell:	60 lur
12 MIZ (48 niverenn):	
Reizh:	72 lur
Studierien, skolidi:	48 lur
Skoazell:	80 lur

Holl chekennoù war anv DAZONT K.R.P.: Roazhon 3133.94T

CPPP 62319

Niver a skouerennoù moulet evit an niverenn-mañ: 1.000